


## KANTIK DA ZANT IELTAZ

DISKAN :

*O Sant Ieltaz, hor Patron,  
Selaouit hor pedenn,  
Gant fizians a greis kalon,  
Ni ra d'eoc'h hor goulenn.  
Warnomp, war dud hor parrez  
Skuilhuit puilh ho pennoz,  
Ma vo santel hor buhez  
'Vit mont d'ar Baradoz.*



1. Siouaz ! 'vel en oc'h amzer,  
Tud fall en hon touez  
'Ra da lezenn hor Zalver  
Eur brezel didruez ?  
Ho sikour a c'houlennomp  
'Vit difenn hor feiz,  
Chomit ato ganeomp  
D'he ziwall en hor c'hreiz.
2. O Sant Ieltaz benniget  
Dreist holl ni 'a c'houlenn  
Beva ato unanet  
Gant al lezenn gristenn.  
N'hor beuz nemet eur galonn  
Ama d'oc'h enori,  
N'hor be nemet eur galon  
Er bed all d'ho meuli.
3. Tud euz hor bro Breiz-Izel  
N'o doa ket c'hoas klevet  
Komzou flour an Aviel  
A zibrad ar spered.  
Ha c'houi dre ho madelez  
Peus desket d'hon tud koz  
Lezenn blod ar garantez  
A gas d'ar Baradoz.
4. C'houi so skedus er c'hloar  
Gant ar Sent en Envou  
Mes ganeomp war an douar  
E chomin ho relegou.  
Eul lodennig anezo  
A zo en hor barrez  
Eun tenzor bras e vezo  
Da gaërraat hor bulhez.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 12 Juillet 1948.

J. CADIOU, V. g.